




Bez an aotrou Perrot e Koatkeo.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Skrivet warnañ : « Pa veuloc'h Mari en he lez
« Va eskern a drido em bez ».

BLEUN-BRUG

Niv. 86 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

KERZU 1955

TAOLIT EVEZ MAT

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1955 ?

Kasit 500 lur (600 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell d'eoc'h beza ezel eus ar Bleun-Brug pe rei d'eomp skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Hon Tad Santel Pie XII a lavar	1
Sant Korantin gant Y.-V. Perrot	2
Deiz-ha-bloaz maro an ao. Perrot	3
Teir gentel, gant an ao. Bleunven	5
Buhez an ao. Perrot	7
Ar manac'h a valee dre e gousk ; R. Kervene	8
Siboud, bioc'h Lambaol : Mab an Dig	10
Ha mont a raimp da bourmen el loar ? gant V. S.	12
Keleier	13
Buhez ar Bleun-Brug	16
Bez an ao. Perrot	16
Lidou sakr	17
Jezuz krouadur, gant Kalloc'h	18

Ar Bleun-Brug e kanv

Moulet e oa ar gelaouenn-mañ, p'eo deuet d'eomp kelou euz maro an Docteur Yann Liberal, bet prezidant ar Bleun-Brug e 1948-49-50.

Goude eur c'hlenved hir ha poanous gouzañvet gant eur spered kristen, aet eo hor mignon da welloc'h bro, d'an 20 a viz Kerzu diweza.

Pedomp evitañ.

Plijet gant e bried, e vugale, e vamm, hag an Tad Chardonnet, digemer hor gourc'hemennou kristen a gañv.



133836
HON TAD SANTEL

Pie XII

A LAVAR DEOMP



« L'Eglise ne peut penser ni ne pense à attaquer ou à mésestimer les caractéristiques particulières que chaque peuple, avec une piété jalouse et une compréhensible fierté, conserve et considère comme un précieux patrimoine. Toutes les orientations, toutes les sollicitudes, dirigées vers un développement sage et ordonné des forces et tendances particulières, qui ont leur racine dans les fibres les plus profondes de chaque rameau ethnique, l'Eglise les salue avec joie et les accompagne de ses vœux maternels... »

Dans le champ d'une nouvelle organisation fondée sur les principes moraux, il n'y a pas place pour l'oppression, ouverte ou dissimulée, des particularités culturelles et linguistiques des minorités nationales...

La longue expérience de l'Eglise l'oblige à conclure que la stabilité du territoire et l'attachement aux traditions ancestrales, indispensables à la saine intégrité de l'homme, sont aussi des éléments fondamentaux pour la communauté humaine...

Ainsi se dévoile l'origine et le point de départ de l'évolution qui jette dans l'angoisse l'homme moderne, sa dépersonnalisation. On lui a enlevé dans une large mesure son visage et son nom...

Pour être efficace, l'organisation politique mondiale doit être de forme fédéraliste. Si vous entendez par là qu'elle doit être affranchie de l'engrenage d'un unitarisme mécanique, vous êtes d'accord avec les principes de la vie sociale et politique fermement posés et soutenus par l'Eglise. Aucune organisation du monde ne saurait être viable, si elle ne s'harmonise avec l'ensemble des relations naturelles, avec l'ordre moral et organique qui régit les rapports particuliers des hommes et des divers peuples... »

On ne fera pas l'Europe avec des déracinés.

Le Pape PIE XII.

Harpet war ar c'homzou-mañ, kouezet diwar muzellou Hon Tad Santel Pie XII, ar BLEUN-BRUG a die kenderc'hel da doulla an ero, boulo'het 50 vloaz a zo bet, gant an AOTROU PERROT, e Maner Keryann-Sant-Nouga.

Bras eo bet labour ar BLEUN-BRUG. Brasoc'h e vo o'hoaz ma kendalc'h, UNANET HA LAOUEN, da vale bepred ouz sklerijenn an TOUR-TAN ne raio biken da zén ebet fazia war e hent.



12^{vet} DEVEZ

A VIZ KERZU

En amzer gwechall, e Koad-Neved, e kalonenn Bro-Gerne, e véve daou vanac'h : unan koz hag unan yaouank : **Primel ha Korantin**.

An hini koz, Primel, baro gwenn dezañ, o veza ma n'en devoa eienenn ebet e-kichen e lochenn a ranke ober eur gwall bennad hent bemdez, en eur jilgamm vit mont da gerc'hat dour.

An hini yaouank, er c'hontrol, en devoa eur feunteun euz ar re sklêr, harp ouz e beniti hag eur pesk burzudus e-barz. Bemdez, war e leverer, e troc'he eun tamm anezañ, hag a-benn antronoz e veze adarre en e béz.

Eun droidad m'edo Grallon, roue ar Gerneviz, o chaseal al loened gouez, e c'hoarvezas gantañ en em gaout gant peniti Korantin, skuizmaro ha naon du dezañ. Ar manac'h a aozas d'ar roue, eun tamm euz e besk. Grallon, dre anaoudegez vat a roas neuze d'ar manac'h santel, al lodenn euz ar c'hoad bras a deuas diwezatoc'h da veza parrez Ploudiern, e-harz ar Menez-Hom. Ober a eure c'hoaz kaeroc'h en e geñver : kas a eure anezañ da Dour ; eno e voe sakret eskob war Vro-Gerne, ha pa zizroas da Kemper e laoskas gantañ e balez da zervichout da iliz.

« Teir sklêrijenn gaer, a lavar eur skrivagner koz, a lufas neuze a-zioc'h menezioù Bro-Gerne, p'edo **Grallon, Korantin ha Gwenole** o terc'hel enni ar renk kenta.

« **Grallon** oa ar roue. Gouarn a rae gant furnez an Argoat hag an Aryor.

« **Korantin** oa an eskob. Têrri a rae sec'hed ar bobl o ranna etrezi evaj presius ar Feiz.

« **Gwenole** oa ar manac'h ha dre e vertuzioù dispar e veritas beza lesanvet **tad ar venec'h**. »

Korantin a varvas e fin ar pempved kantved. En e iliz-veur, e Kemper, e virer c'hoaz eun askorn bras euz e vrêc'h.

Y.-V. Perroz (Buhez ar Zent, p. 853).

deiz ha bloaz maro

an aotrou perrot

D'an 11 a viz Kerzu eo bet lidet e Skrignag 12^{vet} deiz-ha-bloaz maro an Aotrou Perrot, Tad ar Bleun-Brug.

Fellet eo bet gant ar *Bleun-Brug*, evit merka e eured-aour, lakaat war bez e ziazeour eur monumant hag a zale'ho koun anezañ e-doug ar c'hant-vejou da zont.

E gwirionez, prest e oa dija ar monumant-se abaoe dek vloaz. Edod oc'h en em c'houlenn avât, pe e vije lezet korf ar stourmer e Skrignag pe kaset da Sant-Nouga hérvéz c'hoant meur a hini euz e vignoned ha dreist-holl, c'hoant parrezioniz ar barrez-se. Ha setu perak ez eus bet kement a zale evit lakaat ar monumant war ar bez. Kas ar relegou d'eul léc'h all, a vije bet mont a-eneb menoz an Ao. Perrot en doa skrivet e c'hoantae beza beziet e Koatkeo « *ma n'eo ket re ziës* ». Darn a zañje e c'helled en em harpa war ar c'homzou diweza-se evit chench plas d'ar bez. Erfin, deuet eo an holl da gavout gwelloc'h e vije lezet e Koatkeo, ha gwell-a-ze !

Parrezioniz Skrignag a gar e gwirionez an Aotrou Perrot. E vadelez dreist muzul, e zantelez ivez, a zo chomet doun e sperejou ar re o deus e anavezet. Ne vije ket kavet unan hirio er barrez da glask digarezi an hini en deus e lazlet. Ar spont a zo-bet taolet warno a zikouez perak ez int bet chomet mut, ha perak o deus bet aoun o tostaat ouz bez o ferson. Sur oun, avât, e vijent bet feuket ma vije bet lamet diganto relegou an Ao. Perrot. Kement-se a vije bet evito eun dismegañs muioc'h.

...

Klasket e zeus bet ha klask a reer atao mouda eñvor an Ao. Perrot. Met kaer a zo, ano ar merzer a zav atao war gorre. An dour sklêr ne jom morse dindan al lec'hid. Abred pe ziwezat, ar gwir a vez trêc'h d'ar gaou. Hag an tenn en deus e ziskaret e goueled eun hent kleuz, e-kreiz ar goueziri, n'en deus grôt nemet lakaat e ano da splanna muioc'h a-ze.

...

Hiviziken, war gorf ar *Stourmer* e vo gellet gweled, kizellet e mein gaera Breiz, ar groaz a oa evitañ arouez *Feiz ha Breiz*, ar groaz keltiek gant ar c'homzou « *Doue ha Breiz* ».

Aze, en daou c'her-se, evel m'en deus diskouezet an Tad *Alexis-Pressé*, Abad Bodgwenn, eo emañ an diverra euz e vuhez. Evitañ, *Breiz* hep *Doue* n'hellje ket beza eur *gwir Vreiz*. Ne wele ket kennebeut, penaoz e vije gellet prezeg *Doue* en hor c'horn-bro hep diazeza ar gelednaded-se war *Vreiz*, da lavared eo, war herez sakr hon Tadou.

...

D'an 11 a viz Kerzu, ec'h en em gave eta e Skrignag eun toulladig mat a dud, euz pep korn a Vreiz, daoust d'an nebeud a vrud grôt d'ar gouel-se.

An oferenn a voe lavaret da 11 h. 30 gant an Tad Alexis-Pressé. Ar Breze-genn hag a vo kavet eul lodenn anezi amañ, da heul, a voe grêt, gant an Ao. Bleunven, Person Lokournan.

Ar c'han e-doug an oferenn, kaset endro gant kanerien ha kanerezed euz Landi ha Plougerne, a voe dispar. Ken kaer ma lavare eur plac'h yaouank euz Skrignag : « Me ' garfe, emezi, e vije bet aze en iliz, holl barrezioniz Skrignag ».

...

Hir ha lous eo an hent a ya euz bourg Skrignag da Goatkeo. Se ne viras ket e vije bet c'hoaz eno, muioc'h a dud eget en iliz diouz ar mintin.

War dro teir heur, ez oa bodet ouspenn tri c'hant dén endro d'ar bez nevez. Tri c'hant den skoet gant eñvor ar Stourmer koz. Eno e oa moarvat tud a bep liou. Met evit ar mare, pep hini en deus tavet pep enebiez. A ! na pegen kaer, na pegen nerzus e vez dremm ar Vretoned pa lezont a gostez o rendaelou mil-liget ! Mont a raint kuit bremaik, met daoust ha ne gavint ket adarre a-hed an henchou, o flegou koz dañnet ?... Merk bras an deiz eo bet an *Unvaniez* e koun an Aotrou Perrot. Salo e savfe diwarnañ frouez padus, frouez a zilv-digez.

...

Koatkeo eo palez ar Werc'hez e Skrignag. D'ezi pep meuleudi. He c'hantig eo a dregerno da genta. Goude, Gwerz maro an Ao. Perrot, a leunio an drao-nienn. Ne vo ket dizoñjet ar re varo all... Nag ar re veo. Eur bedenn a zo lavaret evit pareañ an *D' Liberal*, bet rener ar Bleun-Brug.

An Tad *Alexis-Presse*, en eur brezegenn nerzus, a lavar an abostol hag ar beleg m'eo bet an Ao. Perrot war dachenn ar Feiz. Kalz re or techet da welled en Ao. Perrot, abostol Breiz hepkén. Mar doa Breizad, ez oa dreist pep tra, *beleg*, ha beleg Hor Zalver Jezuz-Krist.

E-keit ha m'emañ an Tad o venniga ar monumant, kanerien Landi a gan meulgan an Ao. Perrot, e peder mouez : hekleo Bleun-Brug Landi eo oc'h en em astenn betek Koatkeo.

An Ao. *Chauvel*, en ano Tregeriz a lavaro goudeze eur barzoneg dispar war an Ao. Perrot, hag an Ao. *Camille Lemerrier d'Erm* a raio kemend all, e galleg, en ano Breiz-Uhel (1).

Sekretour ar B. B. a lenn eur gér fromus, kaset gant *Dir-na-Dor*, *Erwan ar Moal*, d'e vignon koz an Ao. Perrot : « ...An Ao. Perrot, emezañ, hag a glas-ked diskar, setu heñ ken sonn dirag an holl, muioc'h eget pa oa beo. Klasket 'z eus bet mougañ e vouez, hag e vouez n'eo bet biskoaz kreñvoc'h. Klasket 'z eus bet hen dizenori hag e enor a zo bet savet d'ezañ gant eur c'hardinal ha pemp eskob, e Landivizio, dirag eur mor a dud. Adaleg bremañ, e ano a vo doujet gant an holl Vretoned, re a vremañ ha re da zont, hag evito, euz ar be-mañ, e strinko ar gér-stur a oa e hini. Feiz ha Breiz da wirviken ». (E. ar Moal, 11-12-55.)

Warlerc'h, H. *Caouissin* a lenno eul lizer da lavared emañ Bretoned Pariz a galon ganeomp e-doug an devez.

An Ao. *Pêr Mocaer*, eur stourmer all mar deus unan, er memez léc'h, en doa lavaret kenavo d'e vignon koz, an Ao. Perrot, 12 vloaz a zo. « Kalz a zo ét d'ar bed all abaoe. D'ar re a jom, beza unanet evit ne vo ket, maro an Ao. Perrot, eun aner evit Breiz. »

D'an Ao. *Fave*, aluzenner-meur ar Bleun-Brug, eo e oa da lavared ar gér diweza. Hen ober a raio, ha gant kalz a dan evel ma oar hen ober. Met evel ar re all, he c'her diweza a vo ivez : *Unanet* dreist pep tra evit *Feiz ha Breiz*.

En eur gloza e fell deomp lavared hon anaoudegez vat da «*Unvaniez* Koatkeo », dreist-holl d'an Ao. *Marc ar Berr*, da veza diskouezet kement a volontez vat evit ober euz an 11 a viz Kerzu eun deiz kaer a *Unvaniez*.

...

D'an hevelep deiz ez eus bet lavaret, e N.-D. des Champs, e Pariz, eun oferenn, gant Bretoned Pariz, a unan gant Koatkeo, evit an aotrou Perrot. Eleiz a dud a zo bet en oferenn-se, lavaret gant an Tad Kerdanet, ha prezeget, e galleg hag e brezoneg, gant an Tad Le Borgne, Provincial Tadou Montfort, ha ginidik eus Kleder, Finister.

B. B.

(1) Kavet e vo amañ er miz a zeu, barzoneg an ao. Chauvel.

Teir gentel euz buhez an Aotrou Perrot

(PREZEGENN AN AO. BLEUNVEN E SKRIGNAG)

VA BREUDEUR KÉR,

An deiz warc'hoaz, gouel Sant Kaourantin, a welo o tremen an daouzekved bloaz, abaoe maro trubuilhus an Ao. Perrot, Doue d'e bardono ; an daouzekved bloaz eta, abaoe, m'eo nijet e ene da welloc'h bro.

Araok mont, en abardaez-mañ, da zaoulina war ar bez a vir e relegou, du-hont e-tal chapelig didrouz Koad-Keo, araok mont da welout benniga ar volz nevez, a dle, hiviziken, o gwaskedi, en eun doare dereat, ar volz-se hag a dle beza, evit an amzer da zont, an testeni splann eus doujans hag anaoudegez vat e vignoned, omp en em vodet amañ, en iliz-mañ, hag a zo bet marteze an dachenn galeta eus e vuhez a veleg breizad.

Deuet omp, da genta, da bedi Doue da rei repoz vat d'e ene. Met ive evit diskenn ennomp hon unan, evit goulenn sklerijenn ha nerz, evidomp, da gerzout war e roudou, en ero digoret gantañ ken doun, e park Feiz ha Breiz.

Deuet omp da domma hor c'halonou « ouz an tan a zo bet strinket eus e galon vreizek » hag abalamour ma z'oa ken distag diouz traou ar bed-mañ ha ken birvidik e feiz e Doue, en deus labouret ha stourmet, hep fallgaloni morse, hep koll fizians, en despet d'an holl enebiez en deus kavet war e hent.

Her gouzout a ran, ma ne vije ket bet ar menoziou-se en ho kreiz, ne vijec'h ket deuet amañ hirio...

Hor re varo a gomz atao, hag ar c'henteliou a roont, p'o zelaouer gant evez, a zo goest da vrouda ac'hanomp da genderc'hel gant al labouriou boulec'h ganto.

Ar *gentel genta* a ro d'eomp an Ao. Perrot eo : *labourat*. Ar stourmad n'eo ket echu, evit gwir, ha pa lavaran ar gér-se, e fell d'in komz eus ar pezh a zo da ober evit difenn teñzoriou spered hor bro, evit dihun hor c'henvroiz, deski d'ezo a nevez « an enor hag ar c'hras en deus graet Doue d'ezo da veza bet ganet Breiziz ».

Pa zellomp en-dro d'eomp, war ar poent-se, eo teñval ar goabrenn. Petra welomp, siouaz ! Muioc'h mui aveliou fall ar garantez direiz evit madou an douar oc'h en em skigna, kleñved an nevezentio fall o c'hounit tachenn hag o vennout dizac'ha ha laza bleun kaera eneo kristen ar Vretoned. Hor yaou-ankizou a zo oc'h en em zisgwrisienna diouz douar santel o c'havel !

« Izel eo kouezet an traou » a lavare dija an Ao. Perrot, en e amzer.

Hag abaoe ta !

A ! n'eo ket labour eo a vank da ober.

Ha piou ta eo her graio, o va Doue !

O komz ouz al labour vreizek, Rener Feiz ha Breiz a lavare : « *Gwelet am eus kalz o staga gant al labour-se, eul labour tenn ma z'eus unan ; nebeut avat am eus gwelet o kas o ero da benn : selaouet o deus an abegerien, kant gwech stankoc'h eget an oberourien ; sellet o deus war o lerc'h, chomet int a-sav, aet int war o c'hiz. Fizians am oa o dije graet labour gaer, n'o deus graet netra. Perak ? Kaout a rae d'ezo e c'helled salvi eur vro hep poan. Fazio o deus graet... Na tiegez, na bro ne vez graet hep poan... »*

An *cil kentel* a ro d'eomp an Ao. Perrot, bremañ, muioc'h c'hoaz, pa wel gwelloc'h c'hoaz an traou diouz sklerijenn ar bed all, eo harpa hor buhez hag hol labourou war ar c'halet, da lavaret eo war Hor Zalver Jezuz Krist, an Hini a c'hell pep tra, an Hini a deu digantañ pep sklerijenn, an Hini, evel ma len-nemp, en Aviel hirio, a zo en hon touez, ha ne anavezomp ket ha ne zarem-predomp ket a-walc'h.

« War an Ao. Krist eo, a lavare en Ao. Perrot, da Vleun Brugerien Gwen-gamp, tregont vloaz zo, eo o deus ar zent koz diazezet ar vro-mañ, warnañ e rank chom evit gallout bleunia en he c'haer, Hepdañ n'eus sivilidigez ebet eviti... »

Hogen mard ' emañ e pep lec'h an Ao. Krist, pegwir eo Doue, emañ en hon touez d'eomp, kristenien, muioc'h eget e lec'h all. Stegnet en deus e delt en hor c'hichen, beva ra, koulz lavaret, en hor serr. Ilizou kaer, a bep stumm hag a bep ment, hon eus savet a-zioc'h e aoteriou. Met n'eo ket evit an aoteriou-se eo emañ war an douar. N'emañ tost d'eomp nemet evit dont ennomp alies, an alies ar gwella, dre e gorf hag e wad, hag atao dre e c'hras.

Bez emañ en hon touez, evel ~~etouez ar~~ Juzevien gwechall. Peseurt digemer a reomp d'ezañ ? Prederiet hepkén, ~~eveld~~, gant madou an douar, gant hol labourou, hon doare striz da welout an traou, n'her gwelomp ket, n'her c'hlevomp ket, ne vezomp ket er gêr evit e zigemeret. Hag evelse petra c'hoarvez ? Chom a reomp re alies gant hon dallentez, hor gwanidigez, en em skuiza reomp en aner, tec'hout a reomp diwar an hent, hag e kollomp kalon.

Ankounac'haat a reomp a-grenn komzou an Aviel : « *Hep d'oun-me ne c'hellit ober netra... ma ne labourit ket ganen e kollit hoc'h amzer... an neb a jom ennoun, hag a joman ennañ, hennez a zoug eleiz a frouez.* »

Eleiz a frouez, ya, met ar frouez-se n'en em zispakont ket atao dirak an daoulagad.

Evel ar greun a daoler en nanchou, ar frouez eus labour ha poan an den a c'hell chom ive kuzet, epad pell.

Goude poagna ha pedi — ha buhez an ao. Perrot amañ hen diskouez d'eomp —, ne weler ket atao a vellaen o tont.

Astenn ar vad etouez an dud a zo eun dra start. « *Ar re-mañ, a garie an « ao. Perrot lavaret, a vez kollet a vagadou, ha salvet hepkén a hinennou...*

« *An droug a deu d'an daoulamm*

« *Da vont kuit e vez morzet ha kamm.* »

N'eo ket atao an hini a daol an had eo a eost. Poan ha levezenez a zo daou dra hag a deu d'en em douezia alies e buhez pep abostol gwirion.

Hor Zalver n'en deus ket promettet d'eomp benniga raktal hol labourou, na rei d'eomp ar gounit hag an trec'h... Prometet en deus d'eomp hepkén e c'hras er bed-mañ, hag e rouantelez er bed all. Setu perak e lavar d'eomp : « *Klaskit da genta rouantelez an neñv... an traou all a vezo roet d'oc'h war ar marc'had.* »

An trede kentel a ro d'eomp an ao. Perrot, hirio, eo chom unanet ken etrezomp da labourat.

An Aotrou Krist, gouzout a rae, pa vije aet kuit, an Droug Spered a deuje da glask freuza e labour, setu perak, e bedenn diweza d'e Dad a zo bet evit goulenn ma chomje e ebestel unanet.

Ar merk brasa ne gar ket an Droug Spered ar Vretoned eo ar boan, en deus kemeret hag a gemer, bremañ atao, da c'houeza gwarizi ha dizunvaniez etrezo.

Ha n'eo ket abalamour da ze eo ez int bet diskaret ken alies ?

« Breiz, a lavare an Ao. n'Eskob Trehiou, n'eo ket bras a-walc'h evit beza eun dachenn a vrezel etre he bugale. »

P'emañ an tan-gwall e-barz an ti hag o tispenn an arrebeuri, n'emañ ket ar mare da vont war-dro ar bern plouz, a zo er penn all d'al liorz o tevi.

Lezomp-ta, en han' Doue, a gortez ar pezig a zo o lakaat reuz ha disparti etrezomp, evit beza holl a-unan evit adsevel ene Breiz.

« *Hor bro n'eo ket eur gwiskamant hepkén, n'eo ket gizioù koz hepkén, n'eo ket eun istor hepkén... Breiz a zo, dreist pep tra, eun ene, eur spered, eur galon. Spered hag ene a dleomp klask kompren ha karet muioc'h mui, evit o lakaat da splanna ha da skedi.* »

Labouromp eta, a greiz kalon, an eil krog e dourn egile, harpet war Hor Zalver, sklerijennet gant e gomzou. Ma reomp evelse, neuze e c'hellomp esper amzeriou gwelloc'h ha kaeroc'h evit Feiz ha Breiz, neuze o devezo douget frouez labourou, poaniou ha maro an ao. Perrot, omp deuet da enori amañ hirio.

Evelse bezet graet.

prenit, lennit

L'ABBÉ JEAN - MARIE PERROT

(1877 - 1943)

par M. l'abbé Poisson. 1 vol. de 256 pages, avec de nombreuses héliogravures, aux Editions Pléhon, Rennes. Prix : 900 francs.

La première biographie importante de l'abbé Perrot vient de paraître. Il faut remercier M. l'abbé Poisson, de Rennes, de son entreprise courageuse et réussie.

Malgré les liens qui l'unissaient au héros de son livre, l'auteur a su se garder d'écrire un panégyrique sans discernement. Les douze ans écoulés depuis la mort de l'abbé Perrot sont, sans doute, un délai trop court, à bien des titres, pour permettre un ouvrage définitif ; mais ils ont permis déjà de décanter bien des données de cette histoire : des pages ont été tournées. C'est grâce à la franchise même du biographe que se trouve accru l'intérêt dramatique du récit. S'il reste maint détail, mainte allusion, dont la portée et la signification échapperont aux lecteurs de la génération plus jeune, on peut dire que cela n'a pas d'importance. Ce qui compte, c'est que la personne et les activités de l'abbé Perrot nous apparaissent, quarante ans durant, mais surtout à partir de 1920 au centre d'un drame qui, pour lui, comportait un double enjeu : maintien de la Foi, maintien des traditions bretonnes, *Feiz ha Breiz*.

Ce que fut le prêtre chez l'abbé Perrot est exposé en plusieurs passages du livre, particulièrement au chapitre II (Saint-Vougay), au chapitre V (Plouguerneau), aux chapitres VIII et IX (Scrignac). Il suffit de regrouper ces données pour retrouver, d'un bout à l'autre de sa carrière, un portrait orné des plus belles vertus sacerdotales : amour passionné de Dieu et des âmes, charité exquise, parfois héroïque, sens de l'Eglise, vigueur apostolique, désintéressement total, pardon des injures. Le biographe a vu juste en marquant l'influence que n'ont pas manqué d'exercer, sur l'âme méditative de M. Perrot, les exemples des Saints, dont il s'était longuement imprégné en rédigeant *Buhez ar Zent*. Ce qui frappait un observateur averti, dans les dernières années, c'était de rencontrer, chez un homme au tempérament de lutteur bouillant et obstiné, une âme si pacifiée : quelle maîtrise de soi, acquise par quel ascétisme ! Comme recteur de Scrignac, on admire son zèle, que l'absence d'illusion ne ralentit pas, la sérénité joyeuse de son sacrifice, sachant qu'il semait dans les larmes, ignorant qu'il arroserait les semences de son sang.

Ce portrait du prêtre se continue et se complète dans la description des activités bretonnes de l'abbé Perrot. C'est un aspect essentiel de sa vie, consciemment voulu par lui. Son zèle apostolique, son énergie, son désintéressement ne s'y révèlent pas moins que dans son ministère de vicaire ou de recteur. Mais ici le biographe ne craint pas de laisser voir que le zèle de M. Perrot, si pur dans son inspiration, a été tributaire de contingences qui ont affaibli sa portée et l'ont rendu discutable. La vie de l'abbé Perrot en a été marquée profondément : les limites de son action s'expliquent en grande partie par là, de même que les contrariétés, les épreuves, les échecs qu'il eut à subir. Par contre, il est encore trop tôt pour apprécier et pour décrire les effets positifs de son rayonnement. M. l'abbé Poisson nous en livre quelques traits. Il en sait beaucoup plus.

L'œuvre littéraire de l'abbé Perrot n'est pas non plus l'objet d'une étude approfondie. Dramaturge, publiciste, orateur, cet écrivain abondant et vigoureux mérite qu'on y revienne un jour.

P.-J. N.

(Semaine Religieuse de Quimper
du 29 Juillet 1955.)

Ar manac'h a valee dre e gousk

An hent bras a gas eus kêr-benn ar Savoa, Chambéry, da v-Belley, e departamant an Ain, a dreuz ar Rhône war eur pont a vez graet anezañ « Pont de la Balme », ne pell diouz Yenne, eur gêrig savet war ribl kleiz ar stêr e zoureier herrek ha trouzus.

Tremenet ar pont, e tu dehou an hent, ez eus eur menez roc'hellek, goloet gant dervennou bihan, treut ha krabosek, o kreski gant poan war ar pantennoù serz ha disec'het-se.

War lein ar menez, tri c'hant troatad d'an nebeuta a-us d'ar Rhône, ez eus tiez bras o mogerioù gwenn, hag eur c'hloc'hdi o sevel e vegenn war-zu an neñv.

Eur manati, a lavaro meur a lenner.

Ya. Eur manati, ha koz awalc'h eo anezañ. Savet e voe er bloavezh 1483 gant eur c'hont a Savoa evit Urz ar Chartouzidi.

Betek an Dispac'h bras, manati **PIERRE-CHATEL** (e latin : Petrae Castrum ; e brezoneg : Kastell ar Maen) a voe eur chartouzi e-lec'h ma rene mibien Sant Bruno o buhez a bedenn hag a binijenn. E 1792, ar venec'h a voe diberc'henget diouz o manati, hag ar menez santel a gouezas dindan beli an « Nation », evel ma lavared er mare-se.

Divezatoc'h, ar gouarnement a droas ar manati da vont en eur c'hreñvlec'h. Eur bagad soudardet a voe kaset ennañ da ober gwardoniezh war ar stêr vras a ra eun trouz spontus ouz troad ar rec'hier (1).

Ar gwarnizon a voe lamet da heul ar brezel 1914-1918. Da betra o defe talvezet soudardet kludet war ar menez-se, eun dachenn war var da veza distrujet gant bombezennou an ar c'hirri-nij ?

War-dro 1925, kreñvlec'h Pierre-Châtel a voe lakaet e gwerz « diouz ar gou-lou ». Eun itron intañvez, a gare kenañ traoù an amzer dremenet, a brenas ar manati hag a zeuas da chom ennañ. Tamm ha tamm, ar berc'hennerez a lamas ar c'hempennadurioù graet da loja ar soudarded, speurennoù hag all, da rei en-dro d'ar c'hartouzi koz e neuz hag e c'hened a wechall.

Kalz a labour a zo bet graet, kalz a chom c'hoaz da ober, dreist-holl e diabarz an iliz ; met ar berc'hennerez he deus kalon : dindan nebeut a vloavezhioù, iliz ar venec'h he devo adkavet ar stad a voe hec'h hini araok amzer deñval 1793.

War-dro 1785, edo Priol er chartouzi Dom Duhaget, eun den gouiziek, e galon leun a vadelez. Anavezet ha karet e oa gant ar re wella eus bourc'hizien Belley (ar gêr-se n'emañ ket pelloc'h eget eul leo hanter diouz ar manati).

E-touez ar gêrig, bez e oa eur breutaer, Brillat-Savarin, yaouank c'hoaz, met brudet dija en e rann-vro.

Brillat-Savarin a oa eur mignon leal d'ar venec'h. Bep ar mare, mont a rae da Gastell-Per da varvailhat gant an Tad Priol.

Eun abardaevez ma oa an daou zen o komz diwar-benn kleñvedoù ar spered, setu amañ an danevell a zisplegas Dom Duhaget d'ar breutaer e vignon :

En eur manati all e-lec'h ma 'z on bet priol araok dont amañ, e oa eur manac'h hag a valee dre e gousk. Gwech, ez ae er-maez eus e diig (2) hag e teue

en-dro drezañ e-unan. Gwech, kollet e hent gantañ, e valee a-dreuz ar manati ken m'en em gave gant eur manac'h all a gas anezañ betek dor e lojeiz.

Eun nozvez (eur bern lizerou am boa da gas eur respont d'ezo), chom a ris azezet dirak va zaol-skriva, o labourat aketus. Edo a c'henvreudeur pep unan en e di. Bez e oa an eur da gousket. A-greiz-holl e klevis eun trouzig er-maez, ha me da sellout ouz an nor. An nor a voe digoret gant evez, goustadik, hag ar manac'h a zo bet komzet anezañ uheloc'h a zeuas e-barz ; e zaoulagad a oa digor bras, hogen ne ffinvent tamm ebet ; en e zorn e lufre eur gontell. Mont a reas war-eeun d'am gwele. Neuze, e welis anezañ o sevel e vrec'h hag a skei tri daol gant kement a nerz ma voe toulllet a-dreuz-henn ar goleier-wele hag ar c'holc'hed. Diwar-se, ar manac'h a zistroas etrezek enneun, ha me a welas war a zremm evel eun doare laouen. Mont a reas er-maez evel ma oa deuet e-barz, hep ober an neuz da welet ac'hanoun, o tigeri hag o serri an nor didrouz. Me a yeas ivez er-maez war e lerc'h, hag e welis anezañ o vont e-barz e di.

Pebez abadenn fromus ! Skrija a ran c'hoaz en eur soñjal er riskl a oa bet warnoun da goll va buhez en eun doare ken euzus. Daoulinet war leur va c'hambr, trugarekaat a ris an Aotrou Doue a-greiz va c'halon ; met ken strafuilhet ez oan ma ne voe ket em galloud serri va daoulagad e-doug peurrest an noz.

An deiz warlerc'h, me e gasas ar Breur Porzier da gero'hat ar baleer-dre-gousk, ha pa voe hemañ deuet em c'hambr, goulenn a ris outañ peseurt huñvre en doa graet e-pad an noz. En eur glevout ar gerioù-mañ, va c'henvreur a voe evel trelatet hag a respontas, e zaoulagad o sellout ouz begou e dreid : « O va Zad, eur vez eo din soñjal en huñvre en deus troet em spered e-pad va c'houisk, en nozvez diweza. Teurvezit d'in chom mut war gement-se ».

Me a respontas : « Ar volontez n'he deus perz ebet en eun huñvre. Ho tad ez on dirak Doue. Komzit eta hep an distera aon. Lavarit d'in ar wirionez penn da benn ».

« Va Zad, a lavaras neuze ar manac'h, dec'h da noz, ne oa ket serret mat va daoulagad gant ar c'houisk ma voe lavaret d'in e oa bet lazetaet va mamm ganeoc'h. D'an ampoent, gwelout a ris tasman gwadek an hini varo o c'houlenn diganin ma vije talvezet war ho puhez eur seurt torfed. Neuze, trelatet gant ar gounnar, redek a ris herrus-dall betek dor ho lojig. Mont a ris e-barz, hag o veza aet e-kichen ho kwele, sank a ris teir gwech en hoc'h askre laonenn ar gontell am boa kaset ganin. »

« Eun huñvre ! a lavaris neuze. N'eo ket eun huñvre, va mab. N'eo ket eun huñvre, siouaz ! Sellit ouz golc'hed va gwele », ha me da ziskouez d'ezañ an toul-lou graet gant an taoliou kontell a oa bet skoet warni.

En eur welout ar c'holc'hed toulllet, ar paour kêz a gouezas d'an daoulin, o huanadi. Daerou a ruilhas war e zioujod ha, gant eur vouez leun a hirvoudou, va fedi a reas da rei d'ezañ eur binijenn.

« Ne rin ket, va mab, a respontis, dre ma n'oc'h ket kablus. Pinijenn ebet na vezo roet d'eoc'h. Diwar vremañ, avat, ne deot ket d'an ofisou a vez kanet e-pad an noz. Bemdez, d'an abardaez, ho tor a vezo alc'houeziet gant ar Breur Porzier, ha digoret gantañ da c'houlou-deiz. »

Ar manac'h a asantas d'ar reolenn-se a voe graet diouti betek termen e vuhez. Sellit ouz « Physiologie du goût » gant Brillat-Savarin. Méditation XVII : Du repos.)

Ronan Kervene.

GERIADUR. — Herrek, herrus : rapide. Chartouz : chartreux ; chartouzi : manati chartouzed. Kreñvlerc'h : place forte. Breutaer : avocat. Trelatet : bouleversé.

(1) Ar Savoa a zo bet unanet gant Bro-C'hall e 1860. Kent ar bloavezh-se, ar Rhône, e Pierre-Châtel, a zispartie ar Frañs diouz an Itali.

(2) Hervez lezenn ar Chartouzed, pep manac'h en deus eun ti bihan ha dirazañ eul liorz-zig mogerioù uhel en-dro d'ez. Ar manac'h a labour, a studi, hag a zebr e bredoù en e diig (ar bevañs a vez degaset d'ezañ gant ar Frered geginerien). Mont a ra er-maez hepken da vont d'an iliz pe da lojeiz an Tad Priol.



saoud lambaol

Siboud, bioc'h Job Mezkam

Job Mezkam en doa teir bioc'h : Baz, Brendu ha Ruz. O zeir ken chentil an eil hag eben.

Peuri a zave er bloaz-se, gwasoc'h eget biskoaz. Melchen, Melchen-ruz, rabez ken bras ha boutigi, irvin evel kleier, ha foenn da droc'ha fors pegement e trao-nienn Kerreter.

« Alo, eme Jef da Job, kea da foar Lanniliz ha prén eur vioc'h all ! »
Job ne c'houlenne ket gwelloc'h. Tamm oa an amzer. Eun dervez diskuiz !
Evit diskuiza, an dud, en deiz a hirio, a ya da glask gwalchi o izili.

D'an ampoent — o n'int ket maro, holl, an dud-se — an dud a gave gwelloc'h gwalchi an diabarz eget an diavêz !
Petra fell d'eoc'h, evit an dillad fank, daoust ha n'eo ket evelse eo e tleer ober ?

Met n'eo ket gant dour eo e walc'hed an diabarz !
Dour ? Ni n'omp ket kaniked, na gweklidi !
Gwin, ya ! Hini ruz... hennez a ziskuiz hag a lak da gana !

Job a zizroas d'ar gêr, gant eur sac'had... eur sac'had m'hen asur d'eoc'h !
Met n'en em gavas ket gantañ evel gant re all, a ya d'ar foar da brena moc'h, o lak er c'harr. Ar maro'h furoc'h egeto a gav hent ar gêr... Met er c'harr mui netra ! Eur pimoc'h kouezet e Lanrivoare, eun all e Guidalmeze-goz !

Egile piou oar e pelec'h... n'eo bet morse kavet !
Job, an dén speredek en doa staget ar gorden ouz e vrec'h — hag,, e kreiz an noz teñval-sac'h, e tihunas Jef !

O ! Jef na rae ket a vilou gant he hini koz ! N'he doa grêt netra, hed an deiz, nemet goro ar saoud, o c'has d'ar park, eva kafe, drailha ar rabez hag... an dud.
Skuiz maro, evel bemdez, edo êt da gousket hag e roc'he, evel eur pimoc'h milin, pa glévas lopa war an nor !
E kounnar e savas !
Ne welas ket al lostreugen a vioc'h ; met al lostreugen all avât a welas !
Ha Jef staga gant al litanious en eur staga ar vioc'h nevez !

D'an deiz warlerc'h diouz ar beure, Jef, Job e unan, a jomas mantret da zellet ouz ar vioc'h.

Eur c'horn d'ez e deue betek he fronellou hag egile war he skouarn, eul lagad a zelle wardu Porsal hag egile wardu Sant Ibilio.

Tamm tez ebet ! Eur c'hroc'henn hanter douzet : krooc'henn eur c'haz laer !
— « Lechefre, diot, ne welez ket sklêr : prena eun istrimant a aneval evelse ? »
— « Teñval oa, eun tammig, p'am boa he frenet ! Met fiziañs am eus bet e marc'hadour Plouvian... »

— « Marc'hadour Plouvian ! leue a zo ac'hanout ! Kaout fizians en eur marc'hadour saoud !... dreist-holl eur marc'hadour eus a Blouvian. N'eus e nep lec'h gwasoc'h laeron eget eno ! N'e peus ket gwelet merc'h ar Fri-Berr a zo êt di da vrec'h kaer ?... setu aze eun all !... »

Jef a yae d'an daoulamm warlerc'h merc'h ar Fri-Berr !...
Met pa z'eas da c'horo ! Na pebez respudennad all !
Lêz ar vioc'h a oa melen-beuz !

Saoud Job Mezkam ne vezent ket kaset d'an tevenn gant ar saoud all !
O nann ! Job Mezkam en doa douar awalc'h evit maga e zaoud, dreist-holl abaoe m'en doa feurmet Enez-ar-Beg digant eur c'hamalad evit o lakaat epad an hañv.

En enezennou ar peuri a zav drusoc'h ha dreist holl abalamour d'an holenn a deu gant an avel-vor, ar peuri a zo magusoc'h. An amann a vez kalz gwelloc'h hag ar varc'hadourien a yea a lamm da Jef, p'her gwelent o tont en eur ivrasucellat gant he fanerou, e kichen ti ar C'hreac'h e Gwitalmeze ! Saoud Job Mezkam en em blije kenañ en enezenn. Ar peuri a oa dreist ha pa ziskuizent, gourvezet, an avel vor a zigase betek enno d'houez vat ar bizin. Er Beg nag oa c'houek huñvreal en eur chaogat ar mourrou !

Dioustu pa vezent lezet er mae eus e c'hraou, hep su na pennask, e taoulamme saout Job Mezkam betek ~~Penn ar Beg~~ !

Bioc'h all ebet ne yea d'o heñ ! O nann ! n'oa ket brao ! D'ezo hepken an enezenn !

N'o doa ket aon rak an dour. Pa veze uhel ar mor ez aent ennañ. Ha d'ar par-daez, dreist-holl, evel touristed, e karent chom da dreinellat — evit en em walc'hi.

Pét gwech pa ziskenne an eol a-dre kein Treompan, n'oun ket chomet da zelled ouz saoud Job Mezkam o c'hoari er mor bras. Lavaret e vije bet pesked bras gant kerniel. Beh an amzer e tistagent eur vlejadenn, kaset gant an ekleo, eus eur garreg d'eben, hag an dudchentil, sebezet, a lavare : « Morse n'hon eus gwelet kement all : saoud o neuñv ! ! »

Ha neuñv kaer a ouient. P'en em gavent war an aod, tamm kagal ebet mui outo, o c'hrochen o luia kement m'en em lake ar zaoud all war o daoulin d'o zaludi, hag an dud mantret, ne lavarent grik.

Job avât, d'ar zul, pa veze eur banne gantañ, ne oa nemet eun diskan en e c'hinou : « Va saoud-me ! Fiou en deus saoud evel doun-me ? Baz, Brendu ha Ruz ! Pennad gal ! Set' aze saoud, m'hel lavar d'eoc'h ! »

Paourkêz Job ne ouie dare edo e veud war-nez koueza en e zorn !
E vioc'h nevez a oa o vont da lakat dizale an diskan war e beñ e ginou ar re all.

Evit an dervez kenta, bep tro m'en deveze eur vioc'h nevez, Job, oa ar c'hiz gantañ, dont betek an aod evit gwelet ha mat e tremenfe an traou.

Biskoaz n'en doa bet an distera distokadenn. D'an deiz-se, e teuas adarre. An teir bioc'h a reas anaoudegez gant an hini nevez ! Brendu hepken, goude beza he c'houeset, a grizas he fronellou, en eur sevel he fenn en ear, evel ma seblantfe lavared : « N'he deus ket c'houez ar saoud katolik... »

Ober a reas an neuz da rei d'ez eun taol korn, met ouz he gweled ken damani, ha ken teñval he fenn, e kemeras truez !

Ha dao o feder a-dreuz an tevennou, dre bont ar Froud, betek ar Porzig !
Ar mor n'oa ket gwall izel. Ar pont koulskoude a oa dizolo ! Laboused gwenn Sant-Paol a c'hoarie er poull klouar a jome c'hoaz en e benn.

An teir bioc'h koz a reaz eul lamm er poull hag al laboused spontet a zispakas o diouaskell gwenn en oabl glaz en eur youc'hal.

Ar vioc'h nevez a zeblante beza sounnet. Kas a rae hepken he fenn goustad ouz eun tu d'egile, o klask gweled gwelloc'h pe gompren !

(Da genderc'hel.)

Map an Dig.



ha mont a raimp da bourmen el loar ?

Hervez an dud gouiziek, n'eo mui eun dra dreist galloud an dén.

Konta reer, emeur o farda eur c'hoar vihan d'al loar, da lavared eo emeur e soñj sevel eul « loar vihan » (eun tamm brao bihannoc'h eget al loar eveljust). Pa vo grêt, gant harp teir fuzeenn, e vo sllapet uhel a-walc'h en êr (beleg 500 km.) evit m'ac'h en em lakaio, evel al loar, da drei, drezi he-unan, endro d'an douar, gant kement a herr, ma raio dezañ an dro e 90 munutenn !!! Kendalc'h a raio evelse da drei e-pad seiz pe zek devez. Erfin e kouezo hag e troio, araok teuzi, en eur steredenn lostek.

✱

Laket e vo el loar vihan-se binviou a bep seurt da rei da c'houzout d'an douar ar pez a dremen hag ar pez a weler euz a gen uhel all, dreist-holl poltrejou euz an douar. Kement-se, war a gonter, a vo es a-walc'h d'ober gant harp an televizion.

An Amerikaned a gont ober an taol-êsa kenta araok 1958. Ar « c'hoar vihan-se » d'al loar a gousio dezo, emezo, war-dro tri, miliard hanter a luriou.

Marteze avât, e c'hell ar Russed mont buannoc'h egeto. War an dachenn-mañ, an holl her goar, ez eus heligenta etre an diou vro c'halloudus a gas hirio ar bed endro.

✱

Ar boulou-nij kenta a yelo evelse d'ober pourmenadennoù endro d'an douar, ne vo enno netra veo. Goude, avât, e vo laketa enno logod, kizier, marmouzed... evit gweled petra e teuint da veza, ha diouz ma vo ar bed ganto pa zistoint, e vo laketa tud en o flas.

Unan eus an daou zén en devo komzet ar muia evit kas da benn traou ken souezus, a zo eun Amerikan genidik euz Iwerzon, eur c'helt eta evelomp : James Hagerty, ha ne vo mui huñvreou romantou ar Breizad, Jul Vern.

An holl a oar ez eus 390.000 km. etre an douar hag al loar. Mat, war a greder, e vo gellet ober an hent-se e pemp devez. Ar gwasa ' vo, avât, eo dont endro. War ar gudenn-se eo emañ an dud desket a vremañ o terri o fennou. Ret eo esperout n'o zorrint ket hag e kavint eun diskoulm bennak da blijout d'an holl.

Evit êsaat ar mont-dont etre an douar hag al loar, ar Russed a zo en o zoñj ober tiez-gar etrezo, tiez-gar da chom er vann, el lec'h ma vo gellet chom da denna an alan araok mont pelloc'h.

✱

Pa zoñjer eo ar brezel diweza, ar V 2 dreist-holl, eo a zo penn-kaoz d'ar c'havadennou-mañ ken souezus, e chomer mantrel !

Ha, me ' lavar, an hini ac'hanomp a vevo pell a vezo c'hoaz mantretoc'h gant ar pez a welo.

V. S.



keleier

BLEUN-BRUG LANDIVIZIO

Kenstrivadegou 1955.

1. - Lenn.	Paotred	Merc'hed		
Bihan	2	1	=	3
Krenn	7	4	=	11
Bras	5	8	=	13
En oll	14	13		27
2. - Displega.				
Bihan	10	22	=	32
Krenn	10	23	=	33
Bras	9	13	=	22
En oll	29	58		87
3. - Kan.				
Bihan	7	19	=	26
Krenn	10	26	=	36
Bras	15	36	=	51
En oll	32	81		113
4. - Prezegerez.	4	4		8
5. - Rimadellou.	1	1		2
6. - Kan-Pobl.	3	5		8
En oll				245

O tont eus 40 parrez :

Landivizio, Kleder, Millizag, Gwikar, Gwiseni, Gwikourvest, Plougerne, Bodiliz, Follgoad, Plouzeniel, Plouenan, Pleiber-Krist, Gwinevez-Lokrist, Lambaol, Plabenneg, Plouvorn, Lokournan, Grouaneg, Henvik, Sizun, Gwitevede, Ploueskad, Kastell, Gwiltalmeze, Lann-Per, Plouzane, Bullen, Pempoull, Lanuon, Moustier, Magoar, Lopereg, Edern, Kombrid, Loperhied, Gouezeg, Skrignag, Sant-Turio, Guenin, Santez-Anna-Wened.

Levriou nevez.

Resevet hon eus : « **Toponymie de la côte du Goelo** » (Le Trieux-Bréhat-Paimpol), Enquête de **M. François Ters**, professeur de Lettres, détaché au Centre National de la recherche scientifique. Paris, Imprimerie Nationale. Eur geriadur pinvidik-mor eo evidomp an anioù lec'h, reter hag all, a gavomp el levrig-se. Meuleudi a zo dleet d'an oberour.

Hor mignon **Ernest ar Barzig** en deus embannet eul levr, e galleg, war ar Roc'h-Landreger (**La Roche-Derrien**) gant eur studiaden war brezoneg ar vro ha war ar barz Narcis Quellien. 500 lur + mizou kas. Skriva d'ezañ, rener-skol, Quédillac, Ille-et-Vilaine.

Breiz hor Bro (eul levr nevez all).

Ano eul levrig eo, eul levrig bihan da veza laketa er c'hodell evel eur c'hatekiz, ha da veza lennet, azlennet ha studiet e pep lec'h.

Skrivet e galleg, ennañ e kaver sklerijenn diwarbenn ar pep reta da c'houzout diwarbenn Breiz. Embannet eo bet gant « Kendalc'h ». Savet gant Job Jaffre, Charlez ar Gall, ha penket, araok beza embannet gant kelennerien gristen ha lik. Setu amañ an daolenn anezañ :

Kinnig, gant Per Mocaer — Bretons et Celtes — La Bretagne et son histoire — Notions de Géographie — La langue bretonne — Aspects de l'Ethnographie et du Folklore breton — Monuments de Bretagne — Bro goz hon Tadou — Kendalc'homp — 100 pajenn, 10 skeudenn — prix 150 lur (franco) — her goulenn digant : Bleun-Brug, Châteaulin, Fin. C.C.P. V. Seité, 544.22 Nantes.

Konchou ar gelaouenn.

Euz miz Du 1954 da viz Du 1955 hon eus moulet 10 niverenn euz Bleun-Brug : 8 niv. a 16 pajenn ha 2 niv. a 24 pajenn.

Dispignet hon eus evit an niverennou-se : moullia, klichedou hag all : 405.073 lur. Resevet hon eus evit koumananchou, niverennou gwerzet hag all : 421.674 lur. Bez ez eus eur gounid a 16.601 lur.

Kuzul Meur.

Kuzul-Meur ar Finister en deus bet votet **200.000** lur evit an **F. C. B.** da lavared eo evit kelennadurez ar brezoneg er skolioù, ha **100.000** lur evit « **Ar Skol dre lizer** ». Enor ha bennoz Doue da guzul-meur ar Finister.

Kendalc'h.

Kevredigez an holl strolladoù breizek eo hounañ. Boda' ra tri pe bevar mil a re yaouank. Eun nerz gwirion e c'hell beza evit difenn herez hon Tadou. E Roazon n'eus ket keit-se he deus bet eur vodadenn pouezus meurbet.

Kef ar brezoneg er Skol.

Resevet hon eus bet digant an F.C.B.

Azaleg an 2-12-1954 betek himio..... 810.000 lur

Dispignet hon eus abaoe an 2-12-1954.

« Le breton par l'image » roet da skolioù K.L.T.	145.000 lur
« Yez hon Tadou » d'an hevelep skolioù.....	18.400
Levriou Gwenedeg da skolioù Bro-Wened.....	50.000
Levriou « Ar Bozec » da skolioù Bro-Dreger....	50.000
Levr « Yeun ar Gow » evit prizioù B. B. (K.L.T.)	75.000
Prizioù all evit kenstrivadegoù ar B. B.	150.040
Prejoù liziri ha pakadennoù, beajoù	20.510
Magnetofon evit tremen dre ar skolioù	67.280

En holl..... 576.230 lur
Chom a ra er c'hef..... 223.770 lur

Bodadenn veur an F. C. B. (Emgleo Breiz).

Lenn a reomp er journalioù :

Le dimanche 4 Décembre s'est tenue, à la Chambre de Commerce de Saint-Brieuc, l'assemblée générale de la Fondation Culturelle Bretonne, en présence de nombreuses personnalités et des délégués des grandes associations bretonnes.

Le nouveau Conseil d'administration est présidé par M. le docteur Dujardin, assisté de M. le docteur Kervran et de M. Pierre Mocaër, vice-présidents. Il comprend des responsables des différents groupements : MM. Roy, Ropars, Séité, Pijon, Kéravel, Le Gall, Favenne, M^e Michelet (de la Fédération des Bretons de Paris), Mme de Rohan-Chabot, Mlle Abiven et diverses personnalités, MM. Pierre Hélias, Falc'hun, Trépos, Giot, qui militent tous pour la défense du patrimoine culturel breton et en particulier pour l'enseignement de la langue bretonne.

L'assemblée générale a décidé, à l'unanimité, de demander au C.E.L.I.B. de considérer la Fondation Culturelle Bretonne comme faisant fonction de Commission culturelle près de lui. M. Martray, secrétaire général du C.E.L.I.B., qui assistait à la réunion, a enregistré cette demande qui sera examinée par le Comité directeur de cet organisme. (Deuet ez eus kelou deomp abaoe eo bet digemeret ar goulenn-mañ.)

L'assemblée générale a longuement examiné les questions relatives à l'enseignement du breton.

M. Trépos, professeur à la Faculté des Lettres de Rennes, a tracé un tableau général de la situation de cet enseignement. Il a réclamé une revalorisation de l'épreuve du breton au baccalauréat, des cours dans les Ecoles Normales et la création de postes à temps complet à Quimper et à Saint-Brieuc.

A propos des mesures concernant l'enseignement supérieur, M. Falc'hun, titulaire de la chaire de celtique à la Faculté des Lettres de Rennes, a précisé qu'il faudrait qu'en Bretagne, l'étude des langues celtiques offre aux étudiants, dans le cadre des licences d'enseignement, les mêmes avantages que l'étude des langues scandinaves, aux étudiants normands de la Faculté de Caen.

— L'importance des langues scandinaves, dans le passé de la Normandie, pour suit l'orateur, ne peut se comparer à l'importance des langues celtiques dans le passé et le présent de la Bretagne, et cette inégalité, en France, entre scandinave et celtique, est un scandale qui doit cesser pour le bien de la Bretagne et pour l'honneur de la France à l'étranger, surtout dans les pays celtiques d'outre-Manche.

L'assemblée générale a décidé qu'une Commission d'enseignants et le Bureau rédigeront, incessamment, le programme des demandes qui seront présentées au Recteur d'Académie de Rennes et au Ministre de l'Education Nationale par la Fondation Culturelle Bretonne, avec l'appui du C.E.L.I.B.

L'assemblée générale s'est félicitée du résultat de la 4^e journée de la Langue bretonne et a chargé le Président de Kendalc'h, M. Pierre Mocaër, de remercier les Cercles celtiques, groupes de sonneurs et les Amicales de Bretons, dont les membres ont participé à la collecte de 1955. Le produit de celle-ci dépasse actuellement 2.500.000 francs, chiffre qui fait apparaître le soutien accordé par le public à la cause de la Langue bretonne.

Ar brezoneg er c'hazetennou.

Kazetennou Pariz.

Pell eo bet ar c'hazetennou sizuniek o loc'h. Met loc'het int ha loc'het mat. Ha bremañ ez eus evel helegenta etrezo da c'houzout piou a lako ar muia brezoneg.

Ret eo anzav emañ ar maout gant « **La Terre Bretonne** » (C.G.P. Paris 8301.85, abonn^t 700 fr.) renet gant an Aotrou beleg Elie Gauthier. Pennadoù hir e brezoneg, alies warno blaz c'houek Breiz-Izel a gaver bep sizun er gazetenn-mañ.

« **La Croix du dimanche** », édition de Bretagne (5, rue Bayard, Paris, C.C.P. 1668 Paris, abonn^t 700 fr.), dre vadelez hor mignon an Ao. Jean Fontaine, a zigemer laotek pennadoù e brezoneg bep sizun.

« **La Bretagne à Paris** » eo bet an diweza o loc'h. (C.C.P. 5616.09 Paris. Abonn^t 720 fr.). Met hervez m'eo loc'het e seblant beza loc'het mat. Danvez ar pennadoù (e brezoneg mat) bet betek-hen, a zispiljo marteze : traou dispiljus da gleved. Siouaz, avat ! marteze eo re wir ! N'eo ket an estren atao eo bet brasa enebour hor yez. Amañ, ar Vretoned a c'hell ober o « mea culpa » alies-alies. Ouspenn, tech milliget au dizunvaniez eo bet atao an toull falla ma kouezont ennañ an allèsa. Ha furroc'h int hirio an deiz !... Allaz ! Pa vez unan o sachha war eun tu hag eun all o sachha war an tu all, e vez buan chanet ar c'harr.

« **Le Pays breton** », kazetenn nevez, moulet e Pariz, renet gant M. Hamon, député communiste, a ro ivez eul lec'h frankig a-walc'h d'hor yez, bep sizun.

Kazetennou Breiz-Izel.

En hon diou gazetenn vras pemdeziek, netra, eveljust, a vrezoneg.

« **Le Courrier du Léon — Progrès de Cornouaille** » (8, rue des Gentilshommes, Quimper, Finist. C.C.P. 910.24 Rennes. Abonn^t 700 fr.). Meulenti a dleer d'ar journal-mañ, a dlefe dont da veza journal bras Breiz-Izel, n'eo ket hepkén en abeg d'ar pennadoù brezoneg a gaver ennañ met ive dre ar studioù breizeg talvoudus a embann war ar bajenn « Finistère » koulz lavaret bep sizun. Pep Breiz-Izelad a dlefe lenn ar journal-mañ, koulz ar re a zo er vro hag ar re et euz ar vro. Renet eo ar gazetenn-mañ gant eun den ampart kenañ war e vicher.

« **Le Paysan breton** » (abonn^t 700 fr. C.C.P. 93.978 Rennes). Journal al labourien douar eo hemañ, lennet kalz er Finister hag er C.-du-N. Eur wechig bennag e kaver traoùigoù brezoneg ennañ. Embann a rafe brezoneg, moarvat, ma vefe kavet tud da skriva ennañ. Ac'hanta ! piou her grao ?

War a glevan, ez eus ivez pennadoù brezoneg e « **Le Petit bleu** », journal an Ao. Pleven, hag e « **Renouveau** », journal katolik ar C'h.-du-N.

« **Le Sentier** ». N'eo ket eur gazetenn, met kelaouienn vizek skolioù kristen Eskopli Kemper (13, rue Vis, Quimper). Embann a ra e pep niverenn peder bajennad pe e brezoneg, pe e galleg diwarbenn ar brezoneg. Evel ma ra ar « **Falz** », kelaouienn ar skolioù laik, rei a ra d'ar vistri eun dibab skridou tennet euz oberennou hor gwella skrivagnerien da c'hellout servicha evit mont d'ar B.E.P.C.

Er bloaz-mañ ez eus meur a skol gristen hag o deus dibabet ar brezoneg da vont d'ar brevet (B.E.P.C.). Ar re nevez a anavezomp a zo holl er Finister hag e Bro-Leon.

« **Liziri Breuriez ar Feiz** » (abonn^t 250 fr. Trimestrielle. C.C.P. M. Grill, 25.331 Nantes). N'eus ket keit-se, ar gelaouienn-mañ a oa en he fez e brezoneg. Enni e kaver atao pennadoù mat, en hor gwella brezoneg pobl, plijus ha kentelius, diwarbenn ar misionou katolik. Ar gelaouienn-mañ a vez strewet a vilierou dre holl barrezioù Eskopli Kemper. « **Kannad ar Galon Zakr** » hag a veze ken lennet hag hi, a zo marvet siouaz, n'eo ket, a gredan, dre ziouer a lennerien, met dre ziouer a dud evit skriva enni. Mantrus ! neketa.

BUHEZ AR BLEUN-BRUG

D'ar zul 27 a viz Du, Kuzul-Meur ar Bleun-Brug ha kuzulioù Sant-Brieg ha Gwened, a zo bet en em vodet e Kastell-Paol, endro d'an Aluzenner-Meur.

Roet e oa bet da anaout e vije bet pouezus ar vodadenn-se. An holl dud pedet, eun 30 bennag a en em gavas eta, e presbital Kastell, en deiz-se.

An Ao. Gab ar Moal, hor prezidant, muioc'h mui gwasket gant eul labour tenn, a oa en e zonz rei e blas d'eun all hag en defe nebeutoc'h a labour, hag a vije o chom e Breiz-Izel.

Met kaout eun den da ober ar pezh en deus bet grêt Gab ar Moal er Bleun-Brug, n'eo ket eun dra ès. Eun den eo Gab ha n'en deus morse damantet na d'e boan, na d'e amzer na d'e arc'hant ; eur spered ledan a zén, izeleg ouspenn, hegarat ha ha kom-prenus d'an holl, skoazellet gant eur pried euz ar c'henta... An holl unanet, a lavaras d'an Ao. hag d'an Itron ar Moal pegen glae'haret e vije pep hini ma 'z afent kuit. Dirag kemend-all, hor prezidant a asantas chom c'hoaz eur pennad all. Ha setu laouen an holl.

Ar Bleun-Brug, avât, en deus ezom da startaat e ziazeze. Evit gellout ober kement-se, eo divizet ne vo grêt, e 1956, Bleun-Brug bras ebet, daoust d'ar c'hinnigou plijus grêt deomp gant kêrioù bras evel Gwengamp, ha dreist-holl Brest.

Ne vo grêt er bloaz-mañ nemet Bleun-Brugou bihan : unan e pep rann-vro : Leon, Treger, Gwened ha Kerne. Hini Leon a vo e Keder, d'ar 17 a viz Even. Evit ar re all ne houzer ket c'hoaz.

An Dr Dujardin, prezidant B.-B. Leon, a zo karget da zével e gomite. An Aotronez Duigou ha Merdy a raio kemend-all e Kerne, hag a zibabo al lec'h evit ober ar Bleun-Brug-se. Gwenediz ha Tregeriz a raio kemend-all diouz o zu.

Ret eo digreizenna al labour evit ma 'z aio mat pep tra endro. Eur sekretour, ha goude ma vije eun all ouz e zikour n'heñ ket ober pep tra. Eun emzao ne c'hello mont mat endro nemet gant skoazell efedus pep hini. Da bep hini d'ober ar pezh a c'hell, kalz pe nebeut, ha neuze e troie ar rod.

Ezom en deus ar sekretour da veza skoazellet e pep giz. Keñlabourerien ar gelaouenn a diefe atao kas d'ezañ o skridoù skrivet gant ar skriverez, ha kant tra all evels a c'hell e zizamma...

Arabat dreist-holl, da zen ebet, konta war ar re all evit ober e labour e unan. Pep hini en devo da respont dirak ar prezidant euz al labour bet fiziaet ennañ.

Evit ma 'z aio mat al labour endro, gant urz ha gant emgleo, penna-renerien ar rann-vroioù a en em vodo bep daou pe dri miz gant ar c'huzul-Meur.

An holl a anzav ez eo ret kaout eur gelaouennig c'halleg da skigna menoziou ar Bleun-Brug e-touez ar re yaouank ha ne vint morse tizet gant ar brezoneg. Plou avât a gemero ar garg euz eur gelaouenn evels ? Da genta e c'hello beza roneo-skrivet. He ano a vo « Korn-boud ».

Goulenn a reer ma c'hello Yves al Louz, sekretour an F.C.B. rei eiz devez bep miz d'ar B. B. pegwir en deus H. an Du ranket mont kuit. Ra vo amañ trugarekêt, evit al labour vat en deus bet grêt. — Kuzul an F. C. B., abaoe, en deus digemeret ar goulenn grêt gant ar B. B. evit Yves al Louz.

Bez an aotrou Perrot.

Bez an aotrou Perrot a zo bet desidet ober anezañ, er bloaz 1944 gant an holl g-vredigeziou breizek, en o fenn an eskibien, hag ar Bleun-Brug.

Treset eo bet ar bez gant an ao. James Bouil'e, Doue r'e bardone, d'ar mare-se. Rener ar Bleun-Brug. Al labour a zo bet grêt e ti Donnat, kizeller e Landerne, war c'houlenñ Herri Caouissin, a bacas eul lodenn eus ar bez. Al lodenn all a voe pact gant arc'hant bet roet, d'ar mare-se, gant mignoned d'an ao. Perrot.

Ar Bleun-Brug eo en deus kemeret ar garg da lakaat ar bez en e blas, ha grêt eur galv d'e vignoned da zikour paea ar mizou.

Resevet hon eus betekhen :

Chalon Thomas : 400 lur ; Dr Kervran : 500 ; ao. de Guebriant : 3.000 ; E. ar Moal : 500 ; ao. Guivarc'h : 1.000 ; Yeun ar Gow : 1.000 ; D^{lle} Thevenet : 1.000 ; ao. Laurent : 2.000 ; Dr Cornic : 1.000 ; Itron a Zant-Per : 2.000 ; ao. Poulichet : 1.000 ; D^{lle} Gourlaouen : 500 ; ao. Quelunec : 500 ; Tad Eugène : 500 ; Marcel Audic : 500 ; Hervé Mazé : 500 ; ao. Jannin : 300 ; Moulerez Kerne : 500 ; baron de Longueville : 500 ; D^{lle} Dubuisson : 1.000 ; chalon Ar Ster, Kemper : 1.000 ; D^{lle} Chevillotte, Bréles : 1.000 ; D^{lle} de Kermenguy, Sibiril : 1.000 ; ar gest e Skrignag hag e Koatkeo, d'ar 11, he deus roet : eur bilhed a 5.000 lur, 2 a 1.000 lur, 11 a 500 lur, 116 a 100 lur ha 3.136 lur ouspenn.

Ar pezh a ra en holl : $22.200 \times 27.390 = 49.590$ lur.

Bennoz Doue a greiz kalon d'an holl brofouerien. Digor e chom ar roll. (C.C.P. 544.22 Nantes, V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin.)

N'hon eus ket c'hoaz resevet notenn ar bez. An arc'hant a jomfe ouspenn ar gont a vo dalc'het evit sevel eur c'halvar el lec'h n'eo bet drouklazet an ao. Perrot.

Lidou sakr

Ar « Gloria in excelsis » e brezoneg

(a c'hell beza kanet war an tonioù latin)

- Gloar bepred en nenvou da Zoue.
- Ha d'an holl dud a volentez vat peoc'h e bro an douar.
- D'eoc'h meuleudi.
- D'eoc'h mil ha mil bennoz.
- Holl ni hoc'h ador.
- Ni a gan hoc'h ano.
- Ha ni zeu d'ho trugarekaat abalamour da vraster ho kloar.
- Aotrou Doue, Roue an nenvou, Doue an Tad holl-c'halloudek.
- Gloar d'eoc'h-c'houi ivez. Aotrou Mab unik, o Jezuz-Krist.
- Aotrou ha Doue, Oanig Doue, Mab sentus an Tad.
- Distrujer pe'hejou ar bed, ho pet truez ouzomp.
- Distrujer pec'hejou ar bed, prizit digemer hor pedennou klemmus.
- C'houi azezet en tu dehou d'an Tad, ho pet truez ouzomp.
- Rak c'houi hepken a zo santel.
- C'houi hepken 'zo Roue.
- C'houi hepken 'zo uhel-tre, o Jezuz-Krist !
- Gant ar Spered-Santel e gloar skedus Doue an Tad. — Amen.

(Diwar ar Vuhez kristen.)

Me ho salud Mari

Kan Gregoriat

Me ho sa - lud, Ma ri leun a c'hras, an Aotrou zo

ga neoc'h Benni-get ochdreist an holl gwra gez ha ben-

ni - get frouez ho kort, ye zuz. San tez Mari

Mamm da Zou e pedit e vi domp, pe c'he - rien,

breman hag en eur hor ma ro. Amen

(Diwar « Pedenn evit ar vro ».)

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21697



JEZUZ KROUADUR

gant kalloc'h

I

Jezuz, da zont, tost d'ho kavel,
Galvet omp bet gant mouez eun êl.
Setu ni holl, bremañ bodet,
Dirazoc'h Salver benniget.

II

Pa oa an holl gant o repoz,
Er goañv yén, e-kreiz an noz,
En eur c'hraou paour, o Jezuz dous,
E fellas d'eoc'h genel didrouz.

III

Kaloun an dud en amzer-ze,
A aa kalet hag hep true.
Hag en noz-se, allas, allas !
Ho mamm ar Werc'hez a ouelas.

IV

Kaer he doa mont ha dont dre gêr
Hini ne roas digemer.
'Vit lakaat er béd he Mabig,
Ne gavas nemet eur c'hraouig.

V

Ouz ho kwelet, e-barz eur c'hraou,
Hon daoulagad a skuilh daélou ;
Ouz ho kwelet etre daou lon,
Ar glac'har a voug hor c'halon.

VI

E Bethlehem touez holl geriz
Hini ne roas d'eoc'h lojeiz
Hirio c'hoaz krouadur tener
E pep tachenn ho tisprijer.

VII

M'emaoc'h e pep bro disprijet,
Deuit da di ar Vretoned.
Deuit d'o ziez : eno an nor
'Vel ar galon a zo digor.

A c'hell beza kanet war don :

« O Mabig Jezuz me ho kar »,
pe : « Jesu Redemptor Omnium ».
(Kantikou eskopti Kemper.)